



Brezhoneg Er Familhoù

Mont war raok e Brezhoneg...
gant e vugale !

BEF



Dibenn-sizhun
100% e brezhoneg !



BRASPARZH

8-10 a viz Du 2024

Lun 11 vak evit diskuizhañ !)

Kinniget e vo da bep hini kemer
perzh er mont-en-dro !

An dud hep bugale a vo
degemeret mat evit sikour ar
familhoù d'ober war-dro pe
komz d'o bugale !



Gant souten



Titouroù 06 22 53 13 21

bef@keav.bzh

<https://www.keav.bzh/stajou/brezhoneg-er-familhoù>





Dibenn-sizhun e brezhoneg evit ar familhoù

Deuit HOLL evit kaout plijadur en ul lec'h kaer ha degemerus !

Petra eo pal an dibenn-sizhun ?

1 — EVIT FAMILHOÙ A GROG GANT AR YEZH ER GER

Sikour ar familhoù da gaozeal brezhoneg etrezo : ar vugale, ar vugaligoù hag o zud a oar un tamm brezhoneg, un tamm mat a vrezhoneg zoken, met n'eo ken aezet a se atav kaozeal brezhoneg er familh pa vezer krog da gaozeal galleg !

2 — EVIT FAMILHOÙ A GOMZ DIJA GANT O BUGALE

Un doare da vevañ e brezhoneg en un endro plijus evit ar familhoù a gomz brezhoneg etrezo disourisi, ober anaoudegezh gant familhoù nevez ha sikour ar familhoù all, ober mignoned nevez etreze evit ar vugale hag o zud !

3 — EVIT TUD GOUR HEP BUGALE

Pep hani a c'hall kemer perzh evit dazont ar brezhoneg ! Pleustriñ ar yezh en ur mod fentus gant bugale : evel tad ha mamm hon eus ezhomm eus an holl vrezhonegerien evit plantañ muioc'h a yezh, a sevenadur Breizh, a zeskadurezh a bep seurt (natur, krampouezhañ, chemetoù, etc..) da greñvaat gwrizioù ar vugale !

Petra a vo graet ?

1 — C'HOARI, C'HOARI, C'HOARI !

C'hoarioù a vo graet etre ar vugale, evito d'ober anaoudegezh an eil gant egile, ha kalz a obererezhioù e brezhoneg, ar vugale hag o zud asambles : c'hoarioù a bep seurt, pourmen, kanañ, dañsal, labour-dorn, beilhadegoù...C'hoarzhin dreist-holl zo ur pal e-unan !

2 — KOMZ HA KINNIG HO PARREGEZHOU !

D'an dud gant bugale ha d'an dud gour a zeuio hep bugale e vo kinniget kemer perzh e obererezhioù ar familhoù : lenn istorioù d'ar vugale all estreget o re (ha d'ho re ivez evel just !), kinnig deskoni d'an holl war tachennoù a vestroniañ (kanaouennoù, keginañ, c'hoarioù, sport, anavezout al laboused, h.a....) Rit ket biloù ma n'ouzoc'h ket petra gober, komz diwar-benn me-oar-me zo fiskal kenañ. A-bouez eo evit ar vugale klevout ha komz gant tud arall estreget o familh !

3 — TREUZKAS HO SKIANT-PRENET D'AN DUD ALL

Deuit da sikour ar familhoù n'int ket kustumet da gaozal brezhoneg. Ar simplañ ar gwellañ : displegañ penaos ho poa kroget er gêr, ho tiaesterioù, ho komprenidigezh, petra a ya en-dro pe get hervezoc'h. Abadenn a-ratozh ebet evit an dud gour hep bugale.

Atav ez eus bet graet ur plas d'ar vugale ha d'o familhoù e kampoù KEAV. Met, er mare-mañ, muioc'h eget na oa bet biskoazh, eo a bouez bras sikour ar familhoù d'ober eus ar brezhoneg o yezh... E familhoù ar vrezhonegerien emañ dazont ar yezh.

Ar brezhoneg er skol zo un dra vat, met ma ne vez ket kaozeet brezhoneg er familhoù, n'eo nemet un touell... Abalamour da se e lavaromp : e pep korn-bro e rankomp aozañ stajoù brezhoneg evit ar vugale hag o familhoù. E pep korn-bro hag aliesoc'h-aliesañ !

Dibenn-sizhun e brezhoneg evit ar familhoù

Kinniget e vo da bep hini kemer perzh er mont-en-dro.



*Resisaet e vo ar programm war al lec'h

Priz an dibenn-sizhun

- **Predoù:** dijuniñ, merenn & koan ar Sadorn, dijuniñ & merenn ar Sul.
- **Bod** ar Gwener hag ar Sadorn noz: lojañ a refet en un ti-vakañsoù (80 plas). Evit ar re a fell dezhe e vo posupl kousket en ho teltenn / karavanenn / karr-kampiñ dre ma n'eus tachenn-gampiñ ebet. Implijet e vo salioù dour an dud all.

Da zegas : piknik ar Gwener noz, ar gwin da vezañ evet ouzh taol.

Resisaet e vo deoc'h an dafar da zegas pa vo kadarnaet ho enskrivadur.

Priz digresket evit an dud dilabour, ar studieren, ar ...Deuit e darempred ganeomp.

Ur skodenn-vloaziek a 5€ a vo goulennet digant pep den gour evit bezañ ezel eus KEAV.

Prizioù ar staj	Ti-vakañsoù	Tachenn-gampiñ
Den gour	80,00 €	70,00 €
Bugel (etre 13 ha 17 vloaz)	70,00 €	60,00 €
Bugel (etre 7 ha 12 vloaz)	60,00 €	50,00 €
Bugel (etre 0 ha 6 vloaz)	30,00 €	20,00 €



Gwener 8, Sadorn 9 ha Sul 10 a viz DU 2024

e Ti Menez Are
BRASPARZH

Gounezit amzer: lakait hoc'h anv en-linenn gant al liamm-mañ: <https://framaforms.org/keav-brezhoneg-er-familhou-diskar-amzer-2024-1708081634>

PAPERENN-ENSKRIVAÑ

Da gas **a-raok ar 27/10/24** :

Dre lizher gant ur chekenn:

Faned Pessel Labbay (KEAV);

11 imp/ hent-dall Kerfant; 22220 Landreger / Tréguier

Pe dre bostel gant un dreuzvankadenn: bef@keav.bzh

IBAN: FR76 1558 9297 5400 9947 2794 476

BIC : CMBFRF2BXXX

Tud deuet

Anv-familh	Anv-bihan
.....
.....

Chomlec'h : Kod-post : Kêr :

Chomlec'h elektronek :

Niverenn(où) pellgomz :ha.....

Bugale

Anv-familh	Anv-bihan	Ganet d' .../.../...	Oad	Skoliataet e brezhoneg ?	Hentad ar skol
				Ya <input type="checkbox"/> Ket <input type="checkbox"/>	Diwan <input type="checkbox"/> Prev. <input type="checkbox"/> Pub. <input type="checkbox"/>
				Ya <input type="checkbox"/> Ket <input type="checkbox"/>	Diwan <input type="checkbox"/> Prev. <input type="checkbox"/> Pub. <input type="checkbox"/>
				Ya <input type="checkbox"/> Ket <input type="checkbox"/>	Diwan <input type="checkbox"/> Prev. <input type="checkbox"/> Pub. <input type="checkbox"/>
				Ya <input type="checkbox"/> Ket <input type="checkbox"/>	Diwan <input type="checkbox"/> Prev. <input type="checkbox"/> Pub. <input type="checkbox"/>

Doare-lojañ: **Ti-vakañsoù**

Tachenn-gampiñ

(Karr-kampiñ pe deltenn)

	ya	ket
Bod : (Evit an dud o kousket er savadur hepken) Mat e vo din kousket gant tud all er gambr. Kambrou 2 betek 4 a zo. Ma respontant "ket" e komprenan ne vin ket priorek evit kaout ur plas ma n'eus ket ken a gambrou bihan.	<input type="checkbox"/>	<input type="checkbox"/>
Tud hep bugale: Komprenet em eus ne vo programm ebet evidomp estreget hini ar familhoù	<input type="checkbox"/>	<input type="checkbox"/>
Dont a rin dre ar stummadur dibaouez (formation continue)	<input type="checkbox"/>	<input type="checkbox"/>
Tud nammet (deuit e darempred ganimp evit studial ho koulenn hag an ezhommoù kempouezhañ)	<input type="checkbox"/>	<input type="checkbox"/>
Son: Dont a rin gant ur benveg sonerezh:	<input type="checkbox"/>	<input type="checkbox"/>
Yec'hed : Allergiezh pe angougemer (intolérant) ouzh tra-mañ-tra.	<input type="checkbox"/>	<input type="checkbox"/>
Aotren a ran KEAV da boltredañ, filmañ an dud gour ha bugale evit e deulioù brudañ hag e lec'hienn.	<input type="checkbox"/>	<input type="checkbox"/>

Deiziad:

Sinañ: